

ISTOR-GEOGRAFIEZH HA DESKADUREZH KEODEDEL

An briziadenn-mañ zo teir lodenn enni ha ret-mat e vo deoc’h treiñ anezhe o-zeir:

- Lodenn 1: istoer /13 poent
- Lodenn 2: geografiezh /13 poent
- Lodenn 3 deskadurezh keodedel /10 poent
- Lodenn 4: ar c’hinnig ha reizhskrivadur /4 foent


Barregezh war ar yezh(reizhskrivadur ha doare d’en em zisplegiñ).

ANV: \_\_\_\_\_  
 RAGANV: \_\_\_\_\_  
 KLAS: \_\_\_\_\_

**Lodenn 1: ISTOER** /13

**I. Anavezout ar spisverkoù istorel** /4


- 1. Leuniit ar frizenn gronologel é venegiñ an darvoudoù-mañ :  
**-Emgann Verdun, arsav-Brezel Bras, deroù ar Brezel Bras** /1.5



- 2. Menegit ar savadurioù-mañ... /2

- é implij ar gerioù-mañ: un iliz gotek, ar Partenon, Kastell an Azginivelezh, un iliz romanek.
- ☐ é implij an deziadoù a glot: X-XIIvet kantved; XII-XVvet kantved; Vvet kantved kent J-K, XV-XVIvet kantved.

- 3. Unan ag ar savadurioù n’he deus ket ur rol relijiel : pe hani eo? **Kastell an Azginivelezh** /0.5



• **iliz romanek**  
 ☐ **X-XIIvet kantved**

• **Kastell an Azginivelezh**  
**XV-XVIvet kantved**

• **iliz gotek**  
 ☐ **XII-XVvet kantved**

• **ar Partenon**  
**Vvet kantved kent J-K**

4. Roit termenadur ar ger « gouennlazh »:

/0.5

**Distrujiñ ur bobl. Lazhadeg a-vern ag ur boblad a-bezh evit he c'has da get.**

5. Roit skouer un araokadenn skiantel en XXvet kantved hag hec'h efedoù evit ar gevredigezh /0.5

- **E 1895 e voe ijinet ar skinoù X get ar fizikour alaman Wilhem Conrad RONTGEN.**
- **E-penn kentañ e oa evit skeudenniñ an eskern, àr-lerc'h e oa bet evit kleñvedoù ar skevent èl an tuberkuloz. Hiziv-an deiz eo bet kaset àr-raok an teknik get ar radiografiezh ( evit ur babig e-pad ar brazed) pe an IRM. Pouezus-tre an ijinadenn evit reperiñ kudennoù an empenn pe an diarbenn evit krign-bev ar vronn get ar mammografiezh.**
- **Araokadennoù ar vedisinerezh o deus gellet brasaat ar spi da veviñ pell a 30 vlez.**

6. Savit ur pennad **frammet** é tiskouez eo emgannoù ar brezel Bras **ur feulster a vil-vern.** /3

1. Da gentañ termeniñ ar feulster a vil-vern er Brezel Bras skeudennet en emgannoù:  
Ret oa kemer skouer an Emgann Verdun

2. Temeniñ ar ger get un termenadur sklaer: ur feulster a vil-vern, ur feulster kaset a –benn get ur Stad pe un arme a-benn lazhiñ ar muiañ a dud, sivilid pe soudarded.

3. Ar feulster a vil-vern a zo stag doc'h ar Brezel Bras , en Europa hag e Turkia , ar pezh en deus kaset 10 million a dud marv.  
**Diwallit:** *n'eo ket ur sujed hollek! Ret eo dibab skouer ar feulster a vil-vern da lâret eo da vare an emgannoù. Hervez ar pezh hon eus studiet e oa ar feulster a vil-vern e-barzh 2 skouer resis: Emgann Verdun ha Gouennlazh an Armenianed. Ma savit ur pennad àr feulster a vil-vern a-hed ar prantad brezel a vo **EN DIAVAEZ AG AR SUJED!***

4. Kemeromp skouer Emgann VERDUN

**Respontit da c'houlennoù simpl a-benn magiñ ho pennad:**

**E men?** E Reter Frañs àr dalbenn gornôgel

**Pegoulz?** ? 21 a viz C'hwevrer 1916 hag an 19 a viz An Azvent 1916

**Piv?** An arme c'hall nep d'an arme alaman

**Perak?** Ret eo an arme c'hall herzel en abeg d'an argad alaman àr dalbenn gornôgel Verdun.

**Dezverkoù ar feulster a vil-vern ?**

**-Ur feulster a vil-vern en emgannoù:** niver a dud marv e-barzh daou gamp (> 300 000 marv), niver a soudarded mobilizet àr an talbenn (500 000 soudard gall ), Armoù zo a zo evit bout lazhus a-vil-vern ha kriz: lañs flammoù; gaz

Piloueriñ a ra an artilheri pounner tachenn ar brezel: **4 tonenn a obuzioù dre m<sup>2</sup>** a zo bet bannet e Verdun, 1400 kanon, , 30 milion obuzioù bannet), des tactiques d'offensive stériles et meurtrières (la traversée aléatoire du *no man's land*).

**- Ur feulster a vil-vern evit ar c'horfoù hag ivez speredoù ar soudarded : stuzoù-beviñ diaes en trañcheoù.** Chom a ra ar **Poilu** deiziadoù ha deiziadoù , memes sizhuniadoù é c'hortoz àr an talbenn. **Mantrus** eo ar stuzoù-beviñ , é veviñ **er fank, get ar razed, laou er yenijenn ha glebder get ur yec'honiezh mezhus.** N'eus lec'h prevez ebet, korfoù-marv a chom.

« *L'enfer c'est la boue* ». Stress psikologel bras( efed ar bombezennoù, euzhusted an emgann).

**Disoc'h=** klozadur ? mervel a reas miliadoù a dud e-barzh a daou du. N'eus strategiezh ebet a ya àr –raok.

**II. Studiñ un diell**

**/5**

« Ja! »=Ya

7. Penaos e vez graet ag an den e-kreiz an diell-mañ? Petra eo e garg a-dal 1933? **/1**

**Adolf Hitler, kañseller alaman a-dal d'an 30. 01. 1933**

**“Führer wir folgen Dir”  
Führer, ni a yelo àr ho-  
lerc’h!**



8. Deskrivet an diell ha displegit perak e klok a-feson ar lugan get ar feson eo bet savet an diell. **/1.5**  
**Er renk kentañ emañ Hitler, gwisket e mod soudard. Emañ chef , ar sturier (Führer) ha sturier ar bobl alaman hag a zo a-dreñv dezhañ Mestroniñ a ra Hitler ar bobl hag a zo é saludiñ get ur salud hitlerian. Skrivet eo ar lugan àr ar boblañs, èl ma vehe huchet geti: ar bobl a lâr « ya » da Hitler (anvet e 1933 kañseller en doare demokratel). Prest eo da vonet àr e lerc’h evit rac’h an divizoù a gemero en dachenn vilourel. Gwir eo e pouez ar propaganda nazi àr ar fe fed e rank brasaat an egor buhezva evit an Alamaned**

9. Menegit un doare (pe un diazez= dezver) ag ar renad nazi diskouezet amañ

**/1**

Azeuliñ-den pe brigadenniñ ar boblañs pe soudardiñ ar renad hag ar gevredigezh

10. Petra eo natur ha palioù an diell-mañ? /1.5  
Ur skritell propaganda eo ha pal dezhi eo lakaat àr-wel ar sturier Hitler ha diskouez  
emañ rac'h an dud a-dreñv dezhañ.

**Lodenn 2: GEOGRAFIEZH /13**  
**I. Mestroniñ ar gouiziegezhioù e geografiezh /5**

11. Petra eo kêrbenn ranvroel ha melestradurel Breizh? **ROAZHON** /1

12. Displegit petra an DROM? Roit ur skouer é resisaat ar meurvor pe ar c'hevandir /1  
**Departamant ha Rannvro tramor: Gwiana e Amerika Su pe...**

13. En ur pennad **frammet**, deskivit ha displegit **dasparzh ar boblañs gall àr an tiriad**; Ret mat  
ho po da sevel un digoradur, rannpennadoù hag ur c'hlozadur. /4  
**Digoradur: 60 million a annezidi a vev e Frañs get ur stankter ar boblañs 115  
annezad dre km². Dasparzh ar boblañs àr an tiriad gall eo dizingal.**

**Da gentañ eo strollet an annezidi tro-dro d'an toleadoù-kêr bras (Pariz, Lyon,  
Massalia...) Da skouer Ile-de -France a stroll 20% ag ar boblañs gall. Sachiñ a  
ra ar c'hêrioù an annezidi a-drugarez d'an obererezhioù industriel, kenwerzhel  
hag ivez da skouer evit Pariz ar rol istorel, politikel bras.**

**En eil takad ez eus ur c'hresk-tro a ya a Vreizh betek Elzas-Loren, é tremen dre  
su ar vro. Emañ an annezidi é chom en arvor( arvorekadur) hag ivez er e-barzh  
rannvroioù a zesach tud en abeg d'un endro plijusoc'h hag ivez un hin  
dedennusoc'h( heolgerc'h) da skouer ar Provañs.**

**An dud ivez a zo é vevñ en traoñiennoù èl Liger, Garon, Saena, Ron da lâret  
takadoù industriel.**

**Evit echuiñ ez eus rannvroioù a goll annezidi er rannvroioù kozh , « e  
diagonale du vide » a Champagne-Ardenne, Bourgogne, Menezioù é tremen  
dre Menezioù Kreiz betek Pireneoù. Rannvroioù àr ar maez int,troet àr-zu ar  
labour-douar dre vras, meneziek h a pell ag ar c'hêrioù bras hag ar servijoù  
publik hag obererezhioù industriel.**

**Klozadur: nerzhek e chom ar boblañs gall daoust da dizingalder an  
dasparzh.**

---

---

---

---

An tro-kêriekaat\* zo kreñv en Angoulême ha se abaoe dekvedoù. E-pad 50 vloaz, ar c'hresk demografek en deus degaset un emled eus ar gêr kentoc'h eget ur stankaat eus ar gêr-kreiz. E-keit ma tigrsk un tammig ar boblañs en Angoulême e kresk homañ kalz er c'humunioù tro-dro. Ha ne ra an traoù nemet mont war an tu-se e-kerzh ar prantad 1999-2010.

Ma c'heller displegañ an tro-kêriekaat dre ma klask an dud un endro bevañ gwelloc'h en tro-kêrioù pa c'hellont bevañ en un ti dezho o-unan, e c'heller hen ober ivez dre ma 'z eus tailhoù lec'hel dedennusoc'h.

En ur vont da chom pell eus ar c'hêrioù, ar familhoù a astenn o hent koulskoude, n'eo ket hepken evit mont da labourat met mont davet servijoù a bep seurt ivez (stalioù, melestradurezh, dudioù).

Unan eus palioù al lezenn Grenelle\*\* war an transportoù padus a oa reiñ lañs da doareoù monedone nevez : diorren an transportoù boutin gant sikour ar Stad, sevel ur plan otoioù tredan, diorren ar c'henwetrfañ.

Diwar lec'hienn an INSEE, Décimal n° 325 - Ebrel 2013

\* périurbanisation

\*\* lezenn Grenelle : an holl divizoù evit an diorren padus (2009-2010)

14. Diwar an destenn, menegit evit an tolpad-kêr-mañ:

/2

-ur spas a c'hounez tud

-ur spas a goll tud

**Ar c'humunioù-tro-dro Angoulême : spas a c'hounez tud**

**Ur spas a goll tud: ar c'humunioù tro-dro Angoulême**

15. En destenn, kavet daou abeg a zispleg an tro-kêriekaat:

/2

Daou abeg a zispleg an tro-kêriekaat:

- **Un endro beviñ gwelloc'h get un ti dezhe e-unan.**
- **Tailhoù lec'hel dedennusoc'h**


16. En em zibab àr ur gartenn:

/2

Get sikour an diell-mañ hag ar pezh a anavezit, klokait brastres an tolpadur-kêr-mañ:

- Klokait an alc'hwez:

-Lakait àr ar brastres monedone pemdeziek an dud:



	Kêr-greiz
	<b>Bannlevioù</b>
	<b>Kurunenn trogêrel</b>
	Ahelioù-dezougen pennañ
	Monedone pemdeziek an dud

17. Get sikour an diell hag ar pezh a anavezit deskrivit un heuliad\*ag an tro-kêriekaat (heuliad= efed, conséquence) /2

**-Hiroc’h-hir eo ar monedone etre al lec’h-labour hag ar lec’h annezñ: bemdeziek eo ar monedone; muioc’h-mui a hentoù stank, > efedoù : saotradur, efedoù gaz ti-gwer**  
**-Krignet eo an takadoù àr ar maez= pikouzadur muioc’h-mui a dakadoù krignet get takadoù kenwerzhel, zonennoù annez, kenwerzhel, dudi , hentoù.**

---

---

---

### **Lodenn 3 DESKADUREZH KEODEDEL**

**/10**

#### **I. Goulennoù**

**/5**

18. Roit daou arouez ar Republik skeudennet amañ. /1



<p><b>Marianne</b></p> <p><b>Banniel triliv</b></p>
---

19. « Sokial eo ar Republik c’hall. » E-barzh peseurt testenn e vez meneget-se? Displegit ar frazenn-mañ é roiñ ur skouer. /2

**E-barzh ar Vonreizh 1958 pe er Vvet Republik e vez meneget sokial eo ar Republik c’hall. Kemer a ra perzh ar Republik c’hall karg ar geodediz get diasterioù é sikour get ar RSA(Revenu de Solidarité Active ) pe CMU(Couverture Maladie Universelle) .**

---

---

---

20. Petra a gas deoc’h ar c’heodedourezh europat . Roit daou skouer resis. /2

**Kas a ra gwirioù: votiñ ha bout kannad evit dilennadegoù kêr ha Parlamant Europa**  
**Gwir mont-dont ha chomel en ur Stad ezel a Unvaniezh Europa**  
**Gwarez diplomatek**

---

---

---

---

Tabut(...) Chañchomp ar Marseillaise!  
Galv Graeme Allwright  
« E 1792, àr-lerc’h disklêriadur brezel ar roue  
Aostria, un ofiser gall, Rouget de l’Isle, lec’hiet e  
Strasbourg a savas « kanaouenn vrezel arme ar  
Rin ». En en c’houlenn a ran bepred perak e  
tacl’h ar C’hallaoued da ganiñ, èl kan broadel,  
ur ganaouenn vrezel, get komzoù brezelgar,  
gwadus ha gouennelourel. É sellet doc’h bugale  
vihan é teskiñ ar pozioù spouronus-mañ –pad  
u, me zo bet trubuilhet hag em eus divizet  
sevel ur Marseillaise arall. Un deiz ma divizo  
ar bolitikerien cheñch pozioù ar Marseillaise e  
vo un darvoud meur evit Bro C’hall »  
Lec’hienn Huffingtonpost.fr d’an 03/11/2009

Ar Marseillaise a Graeme Allwright ha Sylvie Dien

Pour tous les enfants de la terre  
Chantons amour et liberté.  
Contre toutes les haines et les guerres  
L’étendard d’espoir est levé  
L’étendard de justice et de paix.  
Rassemblons nos forces, notre courage  
Pour vaincre la misère et la peur  
Que règnent au fond de nos cœurs  
L’amitié la joie et le partage.  
La flamme qui nous éclaire,  
Traverse les frontières  
Partons, partons, amis, solidaires  
Marchons vers la lumière.

Graeme Allwright &, Sylvie Dien  
Texte libre de droit, offert par les auteurs, à  
distribuer sans modération.

4. Petra eo ar « Marseillaise » evit ar Republik c’hall? (ne respontit ket **arouez** met roit ur ger arall)

**Kanaouenn (sonenn) vroadel ar Republik c’hall (devise)**

/1

5. Perak emañ bet trubuilhet ha nec’het G. Allwright? Displegit perak.

/2

**Emañ trubuilhet het peogwir emañ taer, tagus, feulst –tre pozioù ar Marseillaise. Implij a ra ar gerioù « brezelgar », « gwadus » ha « gouennelourel ». Ne glot ket evit ar vugale.**

6. Peseurt talvoudoù ha pennaennoù a vez lakaet àr-wel e-barzh ar Marseillaise savet get G. Allwright ha S. Dien?

/2

**Kas a ra kanaouenn Ar Marseillaise savet get G. Allwright ha S. Dien mennozhioù èl talvoudoù Gwirioù Mab-den adkavet e-barzh ger-stur ar Republik c’hall.**

**Gwir eo eo bet lakaet àr-wel ar frankiz, « liberté » hag ivez ar justis ha torriñ ar baourentez liammet get an ingalded.**

**Evit echuiñ e komz ag ar garentez » amour » « amitié », « partage » a zo anvet « amis ». An oberour a implij ar ger « solidarité », ur ger arall evit komz ag ar « fraternité ».**